

AR VUHEZ KRISTEN



ADMINISTRATION
13, Place Alsace-Lorraine
LORIENT



C/C. POSTAL n° 209-81
SUR
NANTES

Koumanantchou

An holl goumanantchou a gomans e miz Genver. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn ; ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal : **6** l. ar bloaz.

Koumanant a enor : **10** l. ar bloaz, gant

perz e 365 OFERENN (unan bemdez) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennoù-se d'o zud varo.

Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE », evit ma c'hello koumananti a-nevez. —

Ni a gont war bolontez vat hol lennerien evit paera raktal.

An neb n'en devo ket paet *TRI MIZ GOUDE*, ne resevo mui ar gelaouenn.

TAOLIT EVEZ : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : EUN ADKOUMANANT pe EUR C'HOUMANANT NEVEZ ; ma tigasit asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, *DISPARTIA MAT ANEZO*. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eun *EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA...* ha ma'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

Chanj adress

Evit chanj adress, digas d'eomp 4 real e timbrjou gant an adress evel ma oa war an niverenn diweza.

Liziri ha skridou

An holl liziri a dle beza kaset da :

Administration de « Ar Vuhez Kristen »,
13, place Alsace-Lorraine, Lorient (Morbihan)
C.-C. 209-81, Nantes.

N. B. — Ar gelaouenn-man a zo moulet ivez e galleg ; rak-se ar re o defe c'hoant da gaout an hini c'hallek e-lec'h an hini vrezonek, n'o defe nemet skriva d'eomp, hag e vefe kaset d'ezo *La Vie Chrétienne e-lec'h Ar Vuhez Kristen*.

Eur beleg am eus gwelet o vervel...

N'eo ket ar wech kenta eo d'in gwelet tud o vervel. Ar wech kenta avat eo d'am c'halon beza lammet ken buan dirak eun den o vervel...

Ya, kalz tud am eus gwelet o vervel. Er Somme, epad ar brezel bras, em eus klevet soudarded, leun an dachenn, o c'hervel o mamm arak mervel. « Mamm ! Mamm ! » kenta ha diweza ger pep den.

Gwelet am eus o vervel eur plac'h yaouank, sammet gant eur c'hleñved kriz. « Yaouank oun, emezi, hag ar vuhez a zo c'houek. »

Gwelet am eus c'hoaz o vervel eun den pinvidik-mor, a c'houlenne kelou eus e vadou bras betek an eur ziweza ; eul labourer, a lavare d'e vab e-giz kenavo : « ha dreist-holl na werz ket ar foennog vras. »

Eur plac'h yaouank all am eus gwelet c'hoaz o vervel. Epad ugent bloaz e voe brudet, karet ha meulet gant an holl, met eun deiz, aet diganti he gened hag he yaouankiz, ec'h en em gavas dilezet gant an holl, hec'h unan en eun toull kambr, reuzeudik, ar gasoni hag ar glac'har en he c'halon.

Ar wezenn a gouez en tu m'eo kosteziet.

Hag hirio em eus gwelet o vervel eur beleg koz.

*
**

Tri bloaz ha pevar-ugent en doa. Tri ugent vloaz oa abaoe m'edo beleg ha daou ugent vloaz abaoe m'edo person er memes parrez. Ober a rae kalz a vad, nebeud a drouz hag ar c'hazetennou ne gomzent morse anezan.

Eun iliz neat ha koant, eur presbital koz kinvi teo war e doenn hag ouz e vogerioù, eun tammig liorz diou pe deir gestenn wenan ennan, hag en eur c'horn-tro eur c'hi bihan oc'h harzal en e lok, setu holl zanvez ar person koz.

Badezet en doa e holl barrezioniz, graet katekiz d'ezo, eurejet an darn-vuia anezo ha zoken badezet o bugale. Anaoù a rae pep den hag anavezet e oa ganto. E pep ti edo en e di, er gear. Lavaret a rae alies en eur vousec'hoarzin « Anaoù a ran va denvedigou hag anavezet oun ganto. »

Ya ! anavezet edo a-dra sur, ha karet ivez.

*
**

Nag a drubuilhou en doa bet ar paourkez person en e dammig parrez !

Eun dervez e pakas eur prosez evit beza kanet an ofrenn-bred. Ya ! eur prosez, rak bodet en doa an dud hep aotre an Aotrou Mear.

Eun dervez all e welas eur strollad archerien ha soudarded o tont da ober an invantor en e Iliz. An nor a voe digoret a daoliou bouc'hal, met en ilizig baour ne voe kavet nemet pevar re zilhad da oferenna, daou galur arc'hant ha diou zousen bankeier...

Eur pennad goude e voe tennet digantan e bae, laket e arrebeuri d'ezan war an hent, feurmet e brespital teir gwech muioc'h eget na talvez, difennet outan ober prosesionou...

Ar brezel bras a zeuas, setu e iliz hanter zismantret.

Goude ar brezel ar barrez a resevas peadra evit kempenn an iliz. Gant an arc'hant-se ar Mear a lakaas sevel eur poull-kanna nevez.

Paourkez koz !

Met amañ koulz hag e pep lec'h ar garantez a voe trec'h d'ar gasoni.

Daoust d'an heg ha d'an drubuilh ar beleg koz a chomas war al lec'h, epad daou-ugent vloaz, betek ar fin, betek ar maro.

*
**

Bep sul e lavare diou oferenn, unan anezo en eur chapelig eul leo hanter eus an Iliz parrez.

Eur sulvez e voe tapet en hent gant eur barr-amzer fall. Ne chomas ket eun neudenn seac'h outan... paka reas tomm ha yen hag an derzienn a grogas ennan.

D'ar sul warlerc'h, evit ar wech kenta abaoe daou-ugent vloaz, ar person koz ne c'hellas sevel nag ouz an aoter nag er gador brezeg.

E amezog, eur beleg yaouank a voe galvet, rak hep mar ebet ar maro a dostae buan. Ar beleg koz a c'houlennas neuze sakramant an Nouent hag en eur ginnig e zaouarn evit an oleou sakr e lavaras : « Ra ouezo va farrezioniz en deus o ferson koz, hen hag a zo bet alies e kichen o zud

klanv war o zremenvan, gouezet d'e dro sellet ouz ar maro hep krena. »

Pa voe echu an holl lidou ha dibunet an holl bedennou ar c'hlanvour a sellas en eur vousec'hoarzin ouz e vignon yaouank.

« Mignon, emezan, pevar-ugent vloaz am eus, tri-ugent vloaz a zo emoun o servija Anezan. Toullet am eus va ero hag aet oun gantan eüna m'am eus gellet. Mervel a ran laouen, gwelet a res, ha m'am bije eur vuhez all, dek buhez all da rei da Zoue, her grafen gant plijadur. »

Eur pennadig goude : « Labour mat, mignon, ar wella lodenn az peus dibabet, ya ar wella lodenn... » En eur lavarret ar c'homzou-se, e zaoulagad troet ouz e grusifi, en eur vousec'hoarzin, eo maro ar beleg koz.

*
**

Kalz tud am eus gwelet o vervel, n'em eus gwelet hini ken seder hag hemañ dirak ar maro. Kaer eo, c'houek eo ivez kompren petra eo ar vuhez o welet eur beleg koz o vervel

EUR BELEG



O lenn petra emañ ar baotred vihan-man, bern ha bern ?
O lenn « BLEUNIOU KRISTEN AR YAOUANKIZ » skrivet gant « GWENOLE » en niverenn-man eus « AR VUHEZ KRISTEN » pejenn 1043.

Eur Sant nevez e Breiz-Izel

Eur Sant eus hor gwad, ganet e Breiz, en deus bevet e Breiz, en deus labouret e Breiz, hag a zo bet merzeriet e Breiz; e hano eo Per-Rene Rogue eus Urz sant Visant a Baol.

Ginidik eus kêr Wened a gerent paour met kristenien dibab, ar paotrig a reas e studi e kloerdi sant Erwan renet d'ar mare-se gant beleien sant Visant a Baol.

D'an oad a 24 bloaz, e 1782, e voe beleget e iliz-veur Gwened, hag hanvet hep dale da aluzenner e kouent Leanezed ar Retred. E 1786, ez eas da Bariz evit besa resevet er memes Urz eget e vistri kenta. Distroct da Wened daou vloaz goude, e voe karget da gelenn an Teoloji er C'hloerdi bras.

Met setu, evel eun tarz-kurun, ar Revolusion vras o strakal. Beleien, menec'h, leanezed, a rank kuitaat o zi, o bro, pe neuze, douja da lezennou fallakr ha trei kein d'ar relijion.

An Tad Rogue a zilezas e di hag e sae a veleg; met chom a reas e Gwened hep toui le ebet kontrol d'an Iliz santel.

E-pad tri bloaz hag ouspenn, e vevas hep ti na repu, kuzet peurvuia a-hed an deiz. E-doug an noz, ez ae da gofes ha da gomunia ar glañvourien, ha mintin mat e lavare e oferenn en eur c'hrignol bennak.

Da noz Nedeleg 1795, e oa o kas e sakramanchou d'eur c'hlanvour, pa voe diskuilhet gant eur micherour a reseve an aluzen digant e vamm. Evel Hor Salver, gwerzet e oa gant eur mignon evit eun nebeudig arc'hant. Taolet e voe er prizon, barnet ha kondaonet d'ar maro. Er prizon, e roe nerz-kalon d'ar veleien all; savet en deus bet eur c'hantig evit trugarekaat an Aotrou Doue da veza bet her galvet da c'houzanv evit ar feiz.

Araok mervel, e pedas e vamm da zerc'hel da rei aluzen d'an treitour en doa e werzet. Dibennet e voe d'an 3 a viz Meurz 1796, dirak daoulagad e vamm war leurenn-gêr Wened.

Kemeret gant an holl evit eur Sant, e-pad ma veve, netra souezus ma teuas an dud da bedi war e vez. Savet eo bet e relegou e miz Even 1934 ha laket en eur plas a enor en Iliz-Veur. Da zeiz an Asansion 1934, an Tad Rogue a zo bet laket e renk an Dud-Eürus gant ar Pab Pi XI dirak eur bobl tud diredet da Rom.

Ra blijo gant ar Merzer nevez sikour ar Vretoned e vreudeur, da chom atao start en o feiz !



BREUDEUR NI GLEV HO KLEMMOU
EUS AN TU ALL D'AR MOR,
D'HO MOUEZ HO D'HO PEDENNOU
HOR C'HALON ZO DIGOR.



Ar paotrig bihan-man a zo bet tennet e boltred d'ezan gant eur misioner, epad ma 'z edo o pedi en eun iliz dirak an aoter.

Pegen birvidik e tle beza pedenn ar bugelig-se !

Ra zesko bugaligou hor bro, en eur seliet outan, pedi kalonek evit ar baganed vihan ha n'o deus ket c'hoaz an eurvad da anaout Hor Salver Jezuz-Krist.

Evit beza salvet eo ret anaoul .. Mister an eternite

DOR AN ETERNITE A ZIGOR WAR DI AR BARNER

Ti ar Barner eo lezvarn Jezuz Krist : Jezuz Krist-Den, ar c'henta eus an dud, Salver ha Mestr an dud holl, Roue ar bed a-bez, roue an Eternite.

Peogwir eo Roue an Eternite, leal eo ne dafe den d'e rouantelezh da veva gantan, hep beza kavet mat gantan arao. Peogwir eo mestr an dud holl, dre m'en deus o frenet gand e c'hwad, leal eo e kasfe pell dioutan epad an Eternite, ar re n'o d'ezo ket bet ezomm anezan er bed-man. Sklaer eo eta e rank beza great eur varnedigez war an dud holl, arao ma vezint kaset d'o zi eternel.

Ar varnedigez-se a vo graet e diou wech : da genta, war bep hini e unan kaer, raktal pa vo maro, evit gouzout da belec'h e vo kaset, — en eil gwech da fin ar bed, war an dud holl bodet en hevelep lec'h, evit diskouez sklear ha fraez d'an holl en deus an Aotrou Doue renet ha graet pep tra gant lealded ha madelez, hep ober gaou ouz den, en hevelep doare ma ranko zoken an dud daonet o unan anzañ ha youc'hal a bouez o fenn :

« O Doue Eternel ! Just eo ho setans !... ha graet mat ho peus pep tra ! »

*
**

Raktal warlerc'h ar maro e vo barnet pep den e unan-penn.

Sonj mat, lenner ha lennerez, e tigouezo ganez an dra-man : Astennet war da wele, dare da vervel, te a welo en dro d'it da dud o lenva hag o c'hortoz an disparti bras, an disparti glac'harus ha spoutus.

Ha setu m'az peus roet da huanad diweza. Raktal e tostaio da gerent ha da vignoned hag e vezint klevet o lavarout : « Tremenet eo... eman aet... »

Aet eo ? ha da belec'h ?

Ya, tre ma vo da dud o lenva en dro d'az korf maro, epad ma vezint marteze o tigeri da destamant, da belec'h e vezi-te aet ?

*
**

Da belec'h ez a an ene war lerc'h ar maro ? Kant ha kant a dud, etouez ar baganed ha zoken etouez ar gristenien diaviz, o deus skrivet leoriou a bep seurt evit lavaret o sonj diwarbenn ar goulense : lod a lavar ez a an ene d'ar stered; lod all a lavar ez a an ene, ha n'en deus ket bevet mat, e korf eun aneval brao pe vil, evit ober pinienn eus e bec'hejou, da c'hortoz ma teuo en dro war an douar da gemerout eur c'horf nevez evit beva gwelloc'h...; lod all c'hoaz

— 1039 —

a lavar... n'eus netra warlerc'h ar maro... ha pa vezer maro, e vez echu pep tra !...

Diskianterez !... kement se holl.

*
**

Er Skritur Zakr ez eus ger hag a zo diazez Lezenn Jezuz Krist — eur ger hag o deus milionou ha milionou a dud bevet dalc'hmant gant ar sonj anezañ en o spered — ; eur ger hag a lugern e kreiz tenvalijenn ar bed-man evel eul luc'hedenn; hag a laka ar re fall da grena hag ar re vat da gaout frealzigedez, o sonjal e Justis Doue a lakay pep tra en e lec'h ha pep den en e renk — : eur ger hag en deus salvet muioc'h a eneo eget n'en deus kollet biskoaz ar bed dre e fallagriez — ...; ar ger-se eo hen man :

« Eul lezenn a zo douget : an dud holl a varvo ha goudeze e ve-
« zint BARNET »
(Hebr IX 27)

Pe c'hoaz ar ger man :

« En hor sav dirak lez-varn Jezuz krist, e vo dizoloet e vuhez
« da bep hini ac'hanomp, evit ma vo anavezet kement hon dezo
« graet, ar mad pe ar fall. »

*
**

Setu ar wirionez sklear : Mervel a raimp holl. — Met, n'eo ket ar maro eo a dle rei spout d'eomp; ar pezh avat a zo warlerc'h eo ! ar varn hor c'haso d'al lec'h hon dezo meritet : ha kaset da chom eno da virviken — lec'h a sklerijenn pe a denvalijenn — lec'h a levenez pe a enkreiz — lec'h a zaelou hep ehan, pe a eurusted hep par hag a blijadurion peurbadus.

*
**

Ar varn-se, a zo ouz hor gortoz goude ar maro, ar baganed o unan he anaveze.

Setu ar pezh a gaver e leoriou meur a hini eus ar re zesketa ha brudeta, a veve arao Hor Zalver : Platon, Senèque, Pitagor.

— « Kerken dispartiet eus ar c'horf, an ene a ya da veza barnet e kloz ar Wirionez » a lavar Platon, (in campo veritatis).

— « Sellet a ran mat petra da ober, a lavar Senèque, o sonjal en « deiz ma vezo barnet va buhez penn da benn.

— « Bembez, emezan c'hoaz, e tiskennan em c'houshians, hag e klaskan gwelout penaos em eus tremenet va dervez, ha petra am eus graet : ar mad pe ar fall. »

— « Diouallit da lezel ar c'housked da zerra ha taoualgad, arao « beza sellet mat teir gwech, ouz ar pezh ho pezo graet epad an « deiz. » a lavar Pitagor.

— Goulennit ouzoc'h hoc'h unan : Petra em eus great hirio, pe-
« tra a dlefen beza graet ? — Rak, emezan, warlerc'h eur vuhez
« santel, ma tle ho korf trei e poultr hag e ludu, hoc'h ene a vevo
« dalc'hmat, hep aon ebet da vervel birviken. »

Klozomp breman ar pennad skrid-man en eur lavarout : Pege-
ment a gristenien a rafe mat ober evel ar baganed-se ken avizet !

MELEGAN

DIRAG AR BUGEL

Nenv ha douar, meulit ho taou,
Ho krouer, ganet en eur c'hraou,
Ha, dre ar souesusa mister,
Hen ken uhel, deut ken dister.

O nao geur skedus an Elez,
Prinsed en e rouantelez,
Dindan ho tiouaskell a gren,
Kanit eun Doue 'n em c'hraet den.

Bugale Adam hag Eva,
E bro an daelou o veva,
Gant feiz start ha kalon dener,
Bennigit Doue, ho prener.


Heol lagad tan ha mantell aour,
A bar a-uz e lochenn paour,
Taol puilh, euz da garr a roue,
Bannou tomder war da Zoue.

O loar arc'hant, c'hoar an heol roz,
A veilh en nenv, e-doug an noz,
Euz an oabl doun, da balez meur,
C'hoarz d'az Toue, goude da vreur.

O arme dinamm ar stered,
A laka estlamm em spered,
Da heul an heol, da heul al loar,
Kanit Doue, kuzet e c'hloar.

O menezioù, uhel ho penn,
O run rouz, gwisket gant lann wenn,
Liorzou bleun ha parkou ed,
Azeulit Doue, deut er bed.

J. L'HELGOUALC'H. O. M. I.



« Skout »

Piou n'en deus ket gwelet, eun deiz pe zeiz, o tremen dirak dor e di, eur vandenn baotred, eur pikol penn-baz en o dorn, eur sac'h ouz o c'hein, eun tok ledan war o fenn, bragezeir berr ganto ? Mont a reont gant an hent en eur gana, ha pa gavont eur draonienn c'houedor pe eur c'hoad disheol hag a blij d'ezo, e savont eno o zeltenu (tiez-lien). Epad pemzek dervez pe deir zizun an draonienn pe ar c'hoad a zeu da veza evel eur gerig. Bep mintin e tregernont gant pedennou ha kanaouennou an oferenn lavaret e ti ar peder avel, da vare ar pred e sav anezo ar moged teo, ha pa zeu an noz e lugernont gant an tantad-tar a lavar ar baotred ar bedenn endro d'ezan.

Ar baotred-se piou int ? Skouted o kampi ha netra ken.

Ar Skouted a zo bet savet gant eur jeneral saoz, Baden-Powell e hano, breman ez eus demdost tregont vloaz. Bu-an ec'h en em skignont en hor bro. D'ar 25 a viz Gouere 1920 e voe savet kevredigez ar Skouted Katolik, ha daou vloaz goude, an Tad Santel ar Pab a roe d'ezo e aotreadur gant e c'houeka meuleudi hag e wella bennoz.

Hirio ez eus en hor bro ouspenn 50.000 anezo, demdost da 1.500 Aluzenner a labour da lakaat eur vuhez kristen eus ar re starta da ren er bandennadoù skouted. Wardro 30 paotr a zo dre bep bandennad. Abaoe 1920, 95.000 a boa-

tred a zo tremenet dre ar vandennadou, 900 anezo a zo hirio manac'h pe veleg, pe war an hent d'her beza.

Netra souezus e kement-se, rak lezenn ar skout a zo harpet war eun diazez eus ar re gaera : « *Ar skout a zo lorc'h ennan gant e feiz ha d'ezi e pleg e vuhez a-bez.* »

*
**

Setu aman lezenn ar Skout :

Ar Skout a laka e boan da c'hounid fiziañs an holl.

Ar Skout a zo leal d'e vro, d'e gerent, d'e vistri, d'e sujidi.

Ar Skout a zo graet evit servija ha savetei e nesa.

Ar Skout a zo mignon d'an holl ha breur da gement skout all a zo.

Ar Skout a zo seven, taer ha brokus.

Ar Skout a wel en natur labour an Aotrou Doue, karout a ra ar gwez hag al loened.

Ar Skout a sent war ar ger, ha ne ra morse labour hanteret.

Ar Skout a vousec'hoarz hag a gan pa sav bec'h warnan.

Ar Skout a zo glan en e sonjou, en e gomzou hag en e oberou.

*
**


Ar skout a ro e c'her da heuilh penn-da benn al lezenn se ha ganti eo e teuer a benn d'ober anezan « eun den a benn hag a youl start. »

Kalz paotred yaouank en dervez hirio, n'int nemet merc'hodennigou. Ar skout a fell d'ezan beza « *eur gwaz* ».

Kalz paotred yaouank o deus mez o tiskouez ez int kristenien. Ar skout a fell d'ezan beza e pep lec'h hag e pep amzer, « *eur c'hristen penn kil ha troad.* »

Kalz paotred yaouank ne fell d'ezo klask o flijadur nemet er saliou dans, er sinemaioù fall, e kompagnuneziou pennou-skanv. Ar skout a fell d'ezan kaout e levenez o veva muia ma c'hello dindan an amzer, oc'h ober labourioù tenn, o lakaat dalc'hmat e gorf hag e dechou fall da blega d'e spered ha d'e ene; klask a ra dreist holl e blijadur o veza « *servijer e nesa, servijer an holl.* » Ar skout a oar ez eo an holl war an douar-man « *breur an eil d'egile e gwad Hor Salver Jezuz-Krist.* »

PETROMIK.



Bleunioù kristen ar yaouankiz

Tinig ar gaerell, debret-mat he merenn ganti, a rae eur vorenn e skeud eur wezenn-dero, araok mont da glask d'he c'hoan labous pe logodenn... Luskellet gant kanaouenn an avel o tremen war an deliou, Tinig a gouske dinec'h ha disoursi, pa gouezas war he fri-moan eur vezennig, re zare...

Ha setu « koantig » en he zav, ha da redek dre ar c'hoad, buana ma c'helle, hep sellet war he lerc'h. « Petra 'n diaoul 'zo c'hoari ganeoc'h eta Tinig ? » a c'houlennas outi Lanig, eur raz pilgofek, ar c'henta loenig a gavas war he hent. — « O ! Lanig kez, eme ar gaerell, Lanig kez, spountus eo ! Eur skourr-dero a zo kouezet war va fenn, p'edon gant va c'houk-kreiz deiz !... du-hont, e disheol dervenn-goz Koadmenac'h ! »...

Ha Tinig gant he roud,... ha Lanig d'ar piltrot gant e hini, gant aoun na ve ket da genta o skigna eur seurt kelou, dre ar vro... Ne rankas ket mont pell ! Er wenojenn dosta e kavas Per ar c'honikl, hag e vignon Jeromig, azezet war o zammig diadre, marvailhou ganto, na petra 'ta ! « Che ! eme Ber, mil boan d'ezan o kaout e alan, n'ouzoc'h ket an darvoud ? — An darvoud ? — « Ya ! Tinig, hon amezogez !... » — « A zo maro ? »... — « N'eo ket, dre vurd ! met tomm eo bet d'he c'hroc'henn !... An dervenn-goz a zo kouezet warni, p'edo gant he c'houk !... » Hag hep gortoz, ar pilgofek a redas kuit, mall gantan kas ar c'helou pelloc'h. An daou gonikl a reas evel dan...

Dizale an holl, er c'hoad, a oar ar c'helou : Tinig ar gaerell a zo bet hanter-lazet gant an dervenn-goz, diskaret agrenn dre eun tarz-kurun... Lom ar gwiber, strafuilhet evel ar re all, ne ehan ket da hirvoudi : « Loenigou kez, labousigou paour, en an' Doue selaouit holl ! emamp o vont da vervel bras ha bihan. Tinig ar gaerell, a zo bet flastret he c'horfig-moan, dindan an dervenn-goz, diskaret gant ar gurun, hag ar c'hren-douar. Bremaik, e teuy hon tro ! » Ouz e glevet, an holl a red a zehou, a gleiz, spontet, kollet o fenn ganto... Perak ? — Abalamour d'eur « vezennig », re zare, distaget diouz he skourr, gant eur mouchig avel, hag he deus dihonet eur gaerell, e kreiz he c'houk !... Ha netra ken, paourkez loenigou !...

Ha netra ken, tudou ! Rak, re alies an dud n'int ket furoc'h ! Setu eun draig, dister, didalvez : met o vont eus a di Per da di Paol, e teu buan da veza eun torfed. Eun den, gwaz pe vaouez a zeblant rei tro da veza drouk-prezeget pe tamallet e gaou : awalc'h eo ! Ne vezo ket espernet, bezit sur, hag an teodou a yelo endro... Hag evit-se, ivez, eo e kavomp displeget, muioc'h eget n'eo dereat, war ar c'hazeten-nou hag e meur a lec'h all, kement tra fall a zigouez dre ar bed.

Lavaret e ve n'eus war an douar nemet laeron, muntrerien, torfetourien... An traou kaer, an traou a ra enor d'an den, n'eus ano ebet anezo koulz lavaret, zoken etouez an dud onest. Eun druez eo, leun ar c'hazeten-nou, ne gavit ket ?

Traou kaer, traou skouerius a vez graet koulskoude, ha mat e ve komz divar o fenn, vad a rafe o anaout !

Mall eo, d'comp-ni dreistholl kristenien, chench lunedou, ma welimp pelloc'h an aked, ar boan a gemerer evit diarbenn an droug, ha miret outan da vont war gresk. E lec'h skigna ar c'heleir fall, perak ne skignfemp ket ar c'heleier mat ? Gwelloc'h e ve !

Pegwir ar skridou all a zeblant o c'huzet, ni, aman, a fell d'comp o embann, ha c'houi, lennerien, hor sikouro... sur omp, gwella m'helloc'h.

Eun dachennig nevez hon eus prenet evit-se. Mar gellomp he labourat evel m'hon eus c'hoant, warni e kutuilhoc'h, bep miz, eur bokedig a anvimp « Bleuniou kristen ar yaouankiz. » Rak, diarbenn oberou kaer an dud yaouank, pôtrede ha merc'hed, eo e komzimp peurliesas.

Re voazet da glevet konta dizurziou, troiou-kamm ar yaouankiz, ne welomp ket ar boan a gemer tud yaouank a zo, evit chom dre holl ha bepred, — evit lakaat ar re all da jom, — kristenien dispont, glan a galon, laouen atao ; — na welomp ket, awalc'h, labour dispar graet, hirio, gant studierien, martoloded, labourerien ar c'heriou hag ar maeziou, evit gwrizienna dounnoc'h karantez-Doue er c'halonou, ha sklerijenn ar feiz er sperejou.

Ma teu hor menoz da wir, ma kasomp an ero da benn, ar re a lenno an dachennig-man, o welet breuriezou o « breudeur » yaouankoc'h, o kreski, o vleunia, a zougo gant muioc'h a lorc'h o ano a gristen, — a boanio da ober muioc'h a enor d'an ano man, — o devezo mez o skigna diotachou, ravaderez, — hag a glasko, dre o fedennou, o aluzennou, an doare gwella da zispenn ar gaou, ha da sikour, da hentcha, da skoazella, ar re holl, pôtrede ha merc'hed, a zifenn ar wirionez, hag a stourm kalonek, dre o « buhez kristen » — « Evit gloar Doue, mad an eneou, enor an Iliz. »

GWENOLE

Fals Lavariou

Taolit evez ouz ar pezo a glevit endro d'eoc'h, ma n'hoc'h eus ket c'hoant da veza touellet ha kollet. Dre ar bed ez eus kalz droug. Stank int an dud ne valeont ket dre an hent eün hag a glask digareziou evit ober evel ma reont ; d'en em zidamal ec'h en em harpont war ar fals-lavariou a zo skignet a bep tu, hag e kav d'ezo beza direbech, o veza ma reont ar c'hiz.

« *Ret eo digeri hent* » a vez lavaret. Hag e weler tud, evit kaout eur garg bennak, oc'h en em lakat e breuriez ar framasoned, o trei kein d'o Doue, do' relijion. Pep seurt taoliou fall ha divalo a rafent evit kaout ar plas a c'hoantaont. Kenavo lealded hag onestiz ! N'oc'h mui anavezet.

« *N'am eus da renta kont da zen. Mestr oun warnon va unan !* » Fazi bras, gaou spontus. N'oc'h ket mestr warnoc'h hoc'h unan. Ho korf hag hoc'h ene a zo bet roet d'eoc'h gant Doue, ha ganto e tleit servicha Doue. Ar c'horf-ze ne dle ket beza saotret gant an hudurnez. Ho teod n'eo ket roet d'eoc'h evit kana traou divalo, evit dismegansi Doue, met evit meuli Doue. Kont ho pezo da renta da Zoue eus hoc'h holl oberou, komzou, sonjezonou. D'an dud all e tleit rei skoueriou ha kenteliou mat, ha nann o dougenn d'an droug dre ho puhez fall.

« *Me a c'hell lenn pep tra, gwelet pep tra. N'oun mui eur c'houadur.* » Nann, n'hellit ket mont da welet pep tra, n'hellit ket lenn pep tra, ma n'ho peus ket c'hoant d'en em goll evit mat. El lec'h ma vez c'hoariou dizonest ne dleit ket lakat ho treid. War al levriou a zo enno traou divalo ne dleit ket teurel ho taoulagad. Ar c'homzou fall ho pezo klevet gant tud brein o c'halon, an traou fall ho pezo lennet e levriou hudur a jomo en ho spered, a ampoezono ho spered hag a vo evidoc'h heb ehan eur vammenn a dentasionou.

« *Ret eo tremen ar yaouankiz.* » Hag a zo gwir. Ret eo tremen ar yaouankiz, ha tud yaouank a dle gouzout c'hoari ha c'hoarzin, klask plijadur. Met bez ez euz c'hoariou, plijadureziou onest : ar re ze hepken a zere outo.

En em rei d'ar pec'hed, d'an dizurz, beva eur vuhez diroll, karet ar saliou dans, an ebatou-noz, redek an ostaleriou, nann, kement-se n'eo mat nag evit ar re yaouank nag evit ar re all. Goude beza renet eur vuhez diroll evelse, penaos en em reizas diwezatoc'h ha beza fur ? Peseurt danvez tadou

ha mammou a vije e tud yaouank o devije tremenet o yaouankiz oc'h ober pec'hejou ?

« Petra a vezo lavaret, ma ne ran ket evel ar all ? » Lezit an teodou da vont en dro. N'eus forz petra a reoc'h, e vezo komzet diwar ho penn.

Evidoc'h c'houi, grit ho tiviz,
Bezit soudard, den a Iliz,
It d'ar gouent, chomit er bed,
Dimezit, na zimezit ket,
Chomit er vro, chenchit karter,
Kemerit douar, karg pe vicher,
Daoust petra reoc'h pe ne reoc'h ket,
Abeg ennoc'h a vo kavet.

Ma ra mat ar re all, grit eveldo. Ma reont fall, na dit ket d'o heulia, ha lezit an dud da lavaret ar pez a garint. N'e ket gant an dud e vezoc'h barnet goude ho maro, met gant Doue.

Petra a lavaro an dud ? Ar re vat ho meulo, mar dit gant an hent eün. Ar re fall a glasko goapaat, met alies, e goueled o c'halon, e lavarint eman ganeoc'h ar wirionez.

MA TENNIT AR C'HATEKIZ DIGANT AR BUGEL.

Ma tennit e gatekiz digantan...


Ma ne deu mui, goude e bask kenta, d'an oferenn bep sul, evit renevez nerz e ene...

Ma ne ya mui wardro ar beleg, c'houeka mignon a c'hell da gaout...

Ma teu gwirioneziou ar feiz da vervel en e galon a nebeudou...

Petra ray ar bugel pa sailho warnan barr-amzer e dechou fall ? Ped gwech em eus klevet tud yaouank oc'h anzav d'in : « *M'am bije kendalc'het da welet eur beleg ne vijen ket kouezet ken izel.* »

Tadoue ha mammou ha c'hoant ho peus e kouezfe ho pugale izel, izel kenan ? En dervez m'ho po bannet eus ho ti, ar belelg, ar relijion ha Doue, c'houi a glevo hep dale ho pugale o lavaret deoc'h en eur c'hoapaat : « *Ar mad ? an droug ? Petra an dra-se ? Geriou goullou evit ar c'henaoueiñ, ha netra ken.* » Hag ho pugale e vo ar gwir ganto o komz evelse, rak ma n'ez eus Doue ebet, piou ac'hell dont da zeski petra eo ar mad, petra eo ar fall ?



Ar garantez a c'hounit an eneoù



Sant Yann avieler, c'hoant d'ezan ober eur c'hristen mat eus eun den yaouank a gare kalz, her fizias en eun eskob :

« *Beilhit warnan, eme sant Yann, her savit mat, taolit en e galon hadennou an holl vertuziou kristen.* »

An eskob a boanias er penn kenta gant an den yaouank, met, goude beza roet d'ezan sakramant ar Vadiziant hag ar Gonfirmasion, hag e breparet da reseo sakramant an Aoter, e lezas anezan a nebeu-

dou d'ober e benn e-unan, hag an den yaouank a heulias tud eus ar re falla.

Ar pez a dlie c'hoarvezout, a c'hoarvezas.

An den yaouank en em gollas, a gouezas ken izel m'en em lakeas e penn eur vandenn laeron. Da genta ar sonj eus ar c'henteliou mat en doa bet ha mouez e goustians a viras outan d'ober torfejou bras.

Met buan mouez ar goustians a voe mouget; ober a reas pec'hejou bihan ha da-c'houde pec'hejou bras, hag a-benn ar fin e teuas da veza ar gwasa eus e gamaraded. Hada a rae ar spont dre ar vro.

An abostol deuet da c'houlenn digant an eskob kelou eus an tenzor en doa fiziet ennau, a voe rannet e galon o klevet lavaret :

« *Maro eo.* »

— *Maro eo ? Ha penaos ?*

— *Maro da Zoue, eme an eskob, pegwir en deus dilezet an Iliz evit mont dre ar c'hoajou hag ar menezioù evit klask tro da learez.*

— *Ah ! a lavaras sant Yann glac'haret holl, redomp buan*

war-lerc'h an danvad dianket; marteze e c'hellimp e baka hag ober d'ezan distrei. »

Hag en desped d'e oad, sant Yann a yeas etrezek ar menez, el lec'h m'edo e vignon, dioc'h m'en doa klevet. En em gaout a reas gant mevelien kabiten al learon, hag ar re-man a grogas en den koz :

« Me a zo douet aman, eme sant Yann, evit komz gant ho kabiten, hag ho pedi a ran d'an c'has betek emman, rak eun dra a bouez em eus da lavaret d'ezan. »

Abalamour d'e oad ha d'e gomzou grevus, al learon her c'hasas da gaout o mestr. Heman kercent a anavezaz sant Yann, hag o veza n'oa ket gouest da herzel ouz daoulagad eun den ken santel a lenne en e galon, e kemeraz an tee'h.

Ar sant a yeas war e ler'h, buana ma c'helle, en eur grial :

« Perak, va mab, tec'het diouz ho tad ? Perak kaout aon rak eun den dizarmet ? Ho pezet truez ouz va bleo gwenn, ho pezet truez ouzoc'h hoc'h-uman. C'houi a c'hell c'hoaz beza saveteet; na gollit ket fizians. Chomit aze, en han' Doue, chomit. Jezus-Krist e-uman eo en deus va digaset d'ho kaout. »

O klevet eur vouez ken madelezes, an den yaouank n'hellas ket mont pelloc'h. Eur pennad e chomas e zaoulagad tro ouz an douar. Ne grede ket sevel e henn. A-benn ar fin e taolas e armoù hag e redas da gaout ar sant her galve.

Neuze e tirollas da ouela hag e kouezas etre divree'h sant Yann. Kuzat a rae evelato e zourn dehou en doa skoet kement a daoliou fall.

Sant Yann a stardas war e galon e vignon keaz; kregi a reas en dourn a chome kuzet, pokat a reas d'an dourn-se, hag e lavaras d'ezan gant douster ha karantez :

« Ho pec'hejou a vezo pardonet d'eoc'h ! »

Hen tenna a reas eus a douez al lamponed a zaremprede hag a-nevez hen digasas d'an Iliz. Deski a reas d'ezan hent ar binijenn, hent ar silvidigez, ken mat ha ken brao ma c'hellas, a-benn eur pennad amzer, rei d'ezan an Urziou Sakr.

Netra ne c'hell harpa ouz ar garantez.

EUL LEVR NEVEZ :

« An Tornaod »

GANT P. J. GOUR-NA-GIL.

PRIZ : 10 LUR EVIT AR RAKPRENERIEN,

12 LUR EVIT AR RE ALL.

SKRIVA DA : AO. SKILSON,

MENEZ - LAOUENAN — PLOUNERIN. (C. du N.)

LAKIT ETRE DAOUARN HO PUGALE

EVIT MONT D'AN OFERENN :

« An oferenn displeget gant taolennou »

PRIZ : 1 fr. 50; DRE AR POST : 1 fr. 75.

SKRIVA D'AR « VUHEZ KRISTEN. »

